

Ar Micherious, barzhonegoù Ivonig Picard (1859-1925) da lenn ha da glevet

E bered ar Fouilhez ez eus ur bez, ur groaz keltiek warnañ. N'heller ket faziañ, n'eus ken 'met unan. Aes da gavout, diaesoc'h avat lenn ar pezh a zo skrivet war ar maen-bez, aet teuc'h a-hed ar bloavezhioù. « Hini Ivonig Picard eo, » a lavaras din va mamm un deiz (ha hi ganet e 1905, Doue d'he fardono), « un teod lemm ma oa un' avat, prim da sevel pozioù flemmus diwar-benn Fouilheziz, 'pezh a rae aon da dud zo. »

Hiroc'h 'm boa ket klevet diganti avat, hag evit lâret ar wirionez, gwall nec'het ne oan ket gant planedenn va c'henvroad. Souezhet-kaer e oan bet pa oa deut maez e 1992 al levr *Er Fouilhez gwechall* gant Gwendal Denez (*Hor Yezh*), ennañ ur raksrid hir-mat diwar-benn ar barzh hag un dibab eus e varzhonegoù, ar groz anezho tennet eus e zastumad *E menez Arre ha war hor maeziou*, bet embannet e 1922, pe/hag eus ar c'helaouennoù *Kroaz ar Vretoned pe Buhez Breiz*.

Ganet e 1859 er Fouilhez, Picard az eas da gelenner (Kastell-Paol ha Lesneven da gentañ, Sant-Brieg adalek 1915),

'lec'h ma skoulmas mignoniezh gant Vallée ha tud all kar-
yezh evel Taldir Jaffrennou pe Ernault. E-pad an dek vloaz
ma chome dezhañ da vevañ ne baouezas ket da gas testennoù
rimet da Vallée, a veule o reizhder : « ... pa save pezhioùigoù
eus e gornad a Gernev, n'eo ket e yezhig ur gêriadenn a Vreizh-
Izel, hogen e yezh reizh hag unvan [*hini ar mare*] al lennegezh »
(diwar levr G. Denez).

Ma, met petra 'vo kavet neuze e barzhonegoù ar Picard
ken nebeut anavezet ? « Taolennoù rimet a ro deomp Picard
da lenn, ha setu dres o zalvoudegezh, » eme Gwendal Denez.
Taolennoù eus ur bed aet da get, ur bed a oa dija o cheñch,
hervez ar barzh, a deue bep hañv da dremen e vakañsoù en
e barrez c'henidik. Testenioù ivez eus e garantez evit ar vro
gudennek ha garv a anaveze ken mat, karantez ouzh an dud a
veve enni, ouzh ar boazioù kozh lakaet en arvar gant ar Brezel
Bras. Un dispac'her ne oa ket neuze, un taolenner pizh eus
bro ar Menez/Breizh-Izel penn-kentañ an XX^{vet} kantved ne
lavarant ket.

Treñ e skridoù ha reiñ un tamm ton da Ivonig

Andre Mallegol eus Kelerkun er Fouilhez a lavaras din un
deiz e vefe pec'hed ma chomfe barzh ar Fouilhez dianav d'ar
bras eus tud e vro. Ma, emezon, deomp da lakaat anezhañ e
galleg neuze ! Ha dav, loc'het, me hag Andre hag un toulladig
Fouilheziz all gant ar projet, peadra da vodañ tud tro-dro d'ar
brezhoneg war ar memes tro. Met petra treiñ ? D'am soñj din
e oa an testennoù gwellañ en torkad *Micherious* eus al levr *E
Menez Arre...* ; en tu all da ugent barzhoneg, micherioù lod
anezho aet da get bremañ, ur gwir vengleuz a c'herioù hag a
droiennoù. Ha setu ni d'en em welet div wech ar miz, daou
varzhoneg studiet bep taol ha peurechuet er gêr, adwelet
a-stroll a-nevez, peadra da gaout fred 'pad bloaz koulz lâret !

Un dra aes ne oa ket bet avat, da zigentañ abalamour d'ar gwerzhaerezh, rak hor mignon Ivonig a blijee dezhañ tremen eus gwerzhennoù 7 pe 8 troad pe hiroc'h da re 5 pe 6 er memes testenn, setu ret-mat doujañ ouzh ar stumm orin ! Hag ivez, evel-just, abalamour d'ar yezh, gant an holl c'herioù, micherel dreist-holl, ha na vezont ket klevet/lennet ken nemeur (eüruzamant e oa ar paotr Andre un tamm mat barrekoc'h egedon war an dachenn-se !).

Troet an traoù neuze, ha pelloc'h ? Enrollet 'm eus an holl varzhonegoù er gêr. Ha goude ? Embann war baper ? Gwelloc'h 'm eus kavet lakaat skrid (divyezhek, an destenn vrezhonek en he skritur orin – un dibab “asumet” ganin) ha son war hol lec'hienn, digor d'an holl : www.blazproduktion.bzh. Tu zo ivez kaout levr brudetañ Ivonig Picard war ar rouedad : [embann.an.hirwaz.online.fr/document/Picard E Menez Arre ha war or maeziou.pdf](http://embann.an.hirwaz.online.fr/document/Picard_E_Menez_Arre_ha_war_or_maeziou.pdf).

Un draig evit echuiñ : abaoe ez eus bet dibabet gant tikêr ar Fouilhez envel ur wenojenn er bourk « Straed Ivonig Picard ». Da c'hortoz gwelloc'h...

